

PA VOE GANET JEZUZ


Roger Abjean



1. Pa voe gan- (n)et Je- zuz Or Zal- ver, Ma- ri, e Vamm, her mail- hu- ras,
 2. Rag sant Jo- zef en os- ta- le- ri N'en doa ket ka- vet a zi- gor:
 3. E- ki- chen- nig e oa pas- to- red, Hag int di- hun ha c'hoaz war- zao,
 4. Se- tu eun El deut a- berz Dou- e, 0 chom a- zav en o c'hi- chenn,
 5. "N'ho pet ket aon, e- me 'n El san- tel, N'eus ket a dro deoc'h da gre- na;
 6. "E kér Da- vid eo gan- (n)et hi- rio Sal- ver ar béd, gwir Vab Dou- e.
 7. "Ka- voud a reot eur ma- big bi- an, Hag eñ mail- lu- ret en eur c'hraou.
 8. An El a- vec'h en doa pre- ze- get Ma teu- as oll ar- me an Neñ:
 9. Tud an draon- (n)ien, tud ar me- ne- ziou, Kan- (n)om pep hi- ni en e stad:



1. E Bet- le- em, en eur c'hraou dis- ter, Ha war ar plouz hen as- ten- nas.
 2. Red 'vo de- zañ koulz ha da Va- ri En eul lec'h paour klask ar gou- dor.
 3. Dre ma 'z e- dont war- dro o den- ved, Ouz o di- wall e giz ar vro.
 4. Ha spon- tet oll e vo an dud- se Dre eun tarz braz a sklê- ri- jenn.
 5. Me 'zi- gas deoc'h ha d'an dud fi- del Eur c'he- lou mad ha leunn a joa.
 6. Se- laou- it mad, ha me 'la- va- ro Pe- naoz a- na- voud ho Rou- e.
 7. It, pas- to- red, ha ker- zit bu- an, It hag a- do- rit on Ao- trou."
 8. E- lez, E- lez er vann 'vo kle- vet 0 kan- (n)a da veu- li Dou -e:
 9. Gloar da Zou- e e barr an neñ- vou, War an dou- ar peoc'h d'an dud vad!



Ton all evid ar pozioù :

(Autre air ad libitum pour les couplets) :



1.Pa voe - gan- (n)et Je- zuz Or Zal- ver, Ma- ri, e Vamm, her mail- hu- ras
 1.E Bet - le - em, en eur c'hraou dis- ter, Ha war ar plouz hen as - ten- nas.

PA VOE GANET JEZUZ

1. Pa voe ganet Jezuz Or Zalver,
Mari, e Vamm, her mailhuras,
E Betleem, en eur c'hraou dister,
Ha war ar plouz hen astennas.

Gloria in excelsis Deo ! (2 w.)

2. Rag sant Jozef en ostaleri
N'en doa ket kavet a zigor :
Red 'vo dezañ koulz ha da Vari
En eul lec'h paour klask ar goudor.
3. E-kichennig e oa pastored,
Hag int dihun ha c'hoaz war-zao,
Dre ma 'z edont war-dro o denved,
Ouz o diwall e giz ar vro.
4. Setu eun El, deut a-berz Doue,
O chom a-zav en o c'hichenn,
Ha spontet oll e vo an dud-se
Dre eun tarz braz a sklêrijenn.
5. "N'ho pet ket aon, eme 'n El santel,
N'eus ket a dro deoc'h da grena ;
Me 'zigas deoc'h ha d'an dud fidel
Eur c'helou mad ha leun a joa.
6. "E kêr David eo ganet hirio
Salver ar béd, gwir Vab Doue.
Selaouit mad, ha me 'lavaro
Penaoz anavoud ho Roue.
7. "Kavoud a reot eur mabig bian,
Hag eñ mailluret en eur c'hraou.
It, pastored, ha kerzit buan,
It hag adorit on Aotrou."
8. An El a-vec'h en doa prezeget
Ma teuas oll arme an Neñv :
Elez, Elez er vann 'vo klevet
O kana da veuli Doue :
9. Tud an draonienn, tud ar meneziou,
Kanom pep hini en e stad :
Gloar da Zoue e barr an neñvou,
War an douar peoc'h d'an dud vad !

QUAND NAQUIT JÉSUS

1. Quand naquit Jésus notre Sauveur,
Marie, sa Mère, L'emmaillota,
À Bethléem, dans une pauvre crèche,
Et sur la paille elle L'allongea.

R: Gloria in excelsis Deo !

2. Saint Joseph n'avait pas trouvé
D'accueil à l'auberge:
Il lui faudra, à lui et à Marie
Chercher abri dans un pauvre endroit.

3. Tout près se trouvaient des bergers,
Éveillés et encore debout,
Ils s'occupaient de leurs moutons,
Les gardant à la manière du pays.

4. Voici un Ange, venu de la part de Dieu,
Qui s'arrête auprès d'eux,
Et ces gens-là seront tous épouvantés
Par l'impressionnant éclat de lumière.

5. "N'ayez pas peur, dit l'Ange saint,
Vous n'avez pas de raison de trembler ;
Je vous apporte à vous et aux fidèles
Une bonne nouvelle, pleine de joie.

6. "Dans la ville de David est né aujourd'hui
Le Sauveur du monde, Vrai Fils de Dieu.
Ecoutez bien, et je vous dirai
Comment reconnaître votre Roi.

7. "Vous trouverez un tout petit enfant,
Emmailloté dans une crèche.
Allez, bergers, et marchez vite,
Allez et adorez notre Seigneur".

8. L'Ange avait à peine parlé
Qu'arriva toute l'armée du Ciel :
Des Anges, des Anges seront entendus dans les airs,
Chantant pour louer Dieu :

9. Gens des vallées, gens des montagnes
Chantons chacun selon sa condition:
Gloire à Dieu au plus haut des cieux
Et paix sur la terre aux hommes de bonne volonté !